

Tiercelin (Roazon 1846 –Parame 1915)

Barzed Breiz Da Loeiz Kerzilin (1912)

Moedernnaet eo bet an doare-skriva

Taolenn

Frealzidigez da Gerzilin, gand Erwan Berthou
(Kaledvoulc'h)

D'or Barz karet (A. De Carné, Barz ar Arvor)

Salud da Gerzilin ! (Ch. Gwennou (Tal Houarn).

Fealded (Taldir).

Doujañs.(Laterre)...

Kinniget da Dierselin (Abalor)

Da Loeiz Kerzilin (Mathaliz – G. Le Rumeur) (Deuz ar
Gorsedd)

An dervenn goz. An dervenn goz ; (Th. Pilven Ar
Zeveller.)

Frealzidigez da Gerzilin

Greet ah-eus da zevez, o ! Loiz Kerzilin !...
Wae da gador varzeg, en da liorz a hloar,
Ãze bremañ, dindan bannou eun heol klouar :
Ha da benn en da zorn, da vreh war heh ilin,
Lez da zellou da vond, seder, ‘uz d’an douar :
Greet ah-eus da zevez, o ! Loiz Kerzilin !

En donder ar hoajou leh ‘m-eus kuzet Marzin,
‘Mesk ar gwial luziet, leh ne hall den diskenn,
O klask ar Barz keillet¹, te ‘gavas e Deleñn ;
Raktal Brekilien da glemm ha da hoarzin,
An Deleñn o krena gand krenn sakr an Aouenn,
En donde ar oajo eh m’eo kuzet Marzin.

Dre hent al levenez, an treh hag al lore,
Te a zo tremenet en eur yaouankiz hir.
Ar herden aour, ar re arhant hag ar re dir,
Unanet war da deleñn gaer, e peb mare,
A ganas Breiz-Izel, ar Vreiziz hag on gwir,
Dre hent al levenez, an treh hag al lore.

Med ‘n eun hent a dristidigez hag a gañvou``
’Arrrue penn an hent a heuilles diagent.
Deh laouenidigez... O ! kaland kerkent !
O ! skeud an ivin du war dremm hlaz an neñvou !
O ! morad a zaelou, en gourlano divent !...
Hent an distridigez varvel hag a gañvou.

¹ keillet :kelhet.

Petra ‘fell dit ! Setu aze red ar vuhez !
A beb darvoud eo red tenna peb daioni².
Evid arnod ha barn, amañ ‘tremenom-ni
Ar blanedenn n’eo na tener na didruez :
Evel m’emañ, glahar ha joa mesket enni.
Petra ‘fell dit ! Setu aze red ar vuhez !

Pez a dle beza a vezo, eme Wiklan.
Beva a zo gouzañv. Bremañ te ‘h-eus bevet.
Da galvariou ‘ra diouzit eun den galvet,
Rag ar spered galvet a gresk e-kreiz ar boan.
Pez a dle beza a vezo, eme Wiklan.

Enor dit, Telennour ! Meulom Doue, on Tad !
Hag enor hag eñvor d’an Erminig varo !
Son da Delenn santel ‘zo bet klevet er vro.
Marzin, euz e gousk hir, a zihun ‘barz ar hoad,
Hag e Êrouant Ruz a zo distro, fero,
E peb degouez meulom an Tad !

Erwan Berthou (Kaledvoulc’h) a Horsedd Breiz.

² daioni : peb mad.

D'or Barz karet

Me a blij din kleved o sevel kan laouen
Eur vamm a luskella kavell he bugelig.
Eun ebat eo selaou, e skourrou eun dervenn,
Da sklêr al loar, e-pad an noz hlaz, an eostig.

Ar plah yaouank, pa gan eur werz a garantez
A laka da ziskenn, em halon, eun dudi ;
Me 'gar ar barr-avel pa drouz a-dreuz ar gwez.
Ar hleier o seni, ar mor oh hirvoudi.

Kloh benniget, gwagenn glemmuz, trouz an avel
Geiz an evnedigou, soniou flour ar merhed,
Piou 'oh 'ta, e-keñver eur vouez all, mouez santel
Ar barz a zo ennañ galloud braz ar Spered ?

Ho mouez eo, a-wechou kreñv, a-wechou lirzin,
Deoh he-deus kinniget Breiz he zelenn aour glan,
An delenn ma weler warni o vousec'hoarzin,
Eur harlantez bleun brug kemmesket gand bleun lann.

A. de Carné- Barz an Arvor. (Brest 1854 – Bourg-la-
Reine 1943-

Salud da Gerzilin !

Hic erat vir !

(Hemañ a oa eun den !)

Pa goueza an delenn diouz da daouarn skuizet,
Eun hirvoud enne on Breiz dre-oll e oe klevet...
Ar Varzed a lare : « War da lerh, Kerzilin,
Pioua ray dim kleved c'hoaz telenn aour Marzin ?...

Da vouez a oa e vouez, bepred sklêr, dudiuz.
Hag, evid da zelaoue, an oll varzed, doujuz,
A chome hep kana, touellet gand da werziou...
Den, kulz ha te, ne rae tridal o halonou !...

Doue, Breiz ha Bro-Hall !!! Na disparra Dreinded !...
E goueled da galon deze az-poa savet
Eun aoter digeflusk, war an hini³ noz-de'
E skuilles hep paouez teñzor da garante'...

Hag e-pad triwech vloaz, da levr "An Erminig"
A zeskas deim karoud gwelloh-gwell o, Breizig.
On zent koz, on yez flour, feiz kreñv on hentadou
Ha gand kalon ha joa kerzed war o roudou....

Pell amzer on bro Breiz a chomas morgousket,
Gand an Divroidii tammig ha tamm touellet,
Hag heh enebourien fallagr a vousec'hoarze... !
Setu an huanad diweza, emeze !

³ an hini : war behini, er skrid orin.

Warhoaz Breiz a varvo ha, war he bez biken
‘Med linad na gresko... Uhelvarr ha dervenn
Kollet int evidti, ha kollet evid mad... !
Setu eur Bobl nevez o tond muioh d’on grad... «
»

E-pad meur a gantved an dud uhel
D’on Bro, d’on yez karet, a reas dalhmad brezel.
Poan gollet ! On herreg ha drevbra on hoajou,
Gand stard, ma’z int, startoh eo c’hoaz on halonou.

O kleved Kerzilin, Breiziz a zihunas...
« Mervel, emeze ? Nann ! Beva a fell dim c’hoaz
Beva da virvike, !... Honnez eo youl Doue...
War da lerh e redom o kriad : « D’am Buhe’ ! »

Deveziou a fiziañs, a hloar, a levenez
Warlerh deeizou pounner ar boan hag an enkrez !
Setu dihunet Breiz ha war zao adarre,
Ha dit, Barz, evid kalz e tleom kement-se !...

A ! na varvi ket oll ! Du-hont, en da houdor,
En da di Kerazur, savet tostig d’ar mor,
Da ziskibien, doujuz, laouen o halonou
A zered da gas dit ar gwella mennoziou...

Nann ! ne varvi ket oll ! War da lerh e pado
Al labour kaer meurbed en enor on Mamm-Vro.
Ar heuz kaset da benn !... Ar Varzed anaoudeg
A lar dit : »Trugarez, bennoz, mestr kaloneg !

Kerzed war da roudou a zo dim eun enor,
Ha disklêria d'an oll, en Argoad, en Arvor,
E chom ouz da galon staget on halonou,
Hag en da vuhez hir, e kleskom on skweriou.

Skuillet Doue warnout e wella Vennoziou
Ha roet dit ar hras, e diwez da zeiziou,
Da weled o henel eun "Erminig" neve'
Heñvel ouz da hini... A ! na kaerra huñvre !

Salo ma teuy da wir !... Me a garje gweled
War dal al levrig-se da ano kizellet
Da zeski d'on Broiz e oes den a galon,
Eur hristen didrehet hag eur Breizad gwirion !

Ch. Gwennou (Tal Houarn).

Vitry e-tal Pariz, d'an 30 a viz Mae 1912.

Guennou Charlez : Lezardrev 1851 – Vitry-sur-Seine
1915).

Fealded

Kollet gantañ e verh-vihan
An Tad-Koz a houzañve poan
 En e galon :
Hag e zaoulagad leun a zour
A glaske dre-oll eur sikour
 Hag eur mignon.

Mez mignoned na sikour-vad
N'o-deus trehet e huanad
 Nag e anken ;
Hag ar Gourenner dibaouez
A rankas koueza 'n e hourvez
 Heb esper ken.

Hogen ar Vretoned a Vreiz
Evid ar re⁴, gand o oll feiz,
 O-deus stourmet
A frealzo, en e gozni,
Loeiz TIERCELIN, dre desteni
 O fealded.
Jaffrennou (Taldir).

⁴ ar re : pere er skrid orin.

Doujañs

O ! Kerzilin, gwir vab on Barzed koz gwechall :
Gwennc'hlann, Taliezin, Brizeux, Marzin, Riwal
Breiziz a gan hirio da spered ken, uhel,
A veulas a-viskoaz da vro ger Breiz-Izel.

On bro goant a zache da zellou, da gleved,
Da galon, da ene, da gorr ha da spered,
Da werziou a gane on gouenn hag he brazder
Oh entana spered Breiziz leun a herder !

Barz Kerazur, doujet en or Breiz penn-da-benn,
Te 'oa greet 'vid derhel alhwez ar wirionez
A dlefe digeri d'an oll hent ar Furnez.

Ra deuy da skeud, dalhmad, da bara war or penn !
War a-raog e kerzom, hag on spered digor,
'N eur heuilla da skwer vad war douar koz Arvor !

Hippolyte Laterre (Bodlann) (Kerhaez)

Kinniget da Dierselin

An ozah braz, pa gemenne
Trei an douar war ar mene',
E *Park Meur ar Hanaouennou*,
Dalhet 'vidom gand on Tadou.

Eñ da genta,gand an alar,
Prim a grohe an douar tomm,
Eeun e vomm, hag ar zoh kromm
A lugerne 'kreiz ar breinar... :

Meur a vevel greet dioh e zorn,
'Deus palaret tachenn on bro :
Adal Roazon bet' an Elorn
Eo mab dezañ neb a gano !

Pell 'zo ez ee da labourad,
O farda deom or magadur...
'Med eun devez skuiz gand 'n arad
En em roas d'e Donkadur.

Neuze e floh, Barz e ano,
'Zavas 'n e spered ar c'hoant-mañ :
« Er mod all kasom an ero
'Vid ma vo al labour brava ! »

Meur a ervenn a oe stignet,
Houmañ didro ha divesket,
Honhont krommet e mod Gwened,

Krennet ma oa he diwaskell.

E pep seurt mod Barz a hade,
Pep seurt teilhaj a zegase,
Kirri stlejet gand ohen,
Bet' an talar, bet' ar pengenn.

Ha set' an ozah o tihun...
O weled, e samm e galon,
Hag eñ, raktal, mond gand ar run,
Pell dih ar Park 'n eun draoñienn don.

'N eun draoñienn don, war ribl ar mor,
Leh 'mañ e di, sioul ha didrouz,
O kas e voged d'an oabl rouz,
'Vel glahar, pell diouz peb goudor !

War lein an dosenn pa arruas,
'Tal an ti, kent ma tiskennas
Ouz *ar Park-Meur* 'taolas eur zell,
E zaoulagad 'vel diou stivell.

War dreuzou e zor azezet
Ne vire ket ouz e zaelou
Da ruillal druz war e jodou :
« Setu bremañ ma foan kollet ! »

Ha kement-se pa lavare,
Eur strollad braz a vugale,
En o daouarn bara gwiniz,

‘Veulennezañ⁵ heb dsikuiz :

Eñ eo a zeskas ar re all
War gounid ‘n ed n’eus netra gwell :
E an’ war diweuz Breiz-Izel
Biken n’ehano da nijal ! »

Leon Le Berre (Abalor).

⁵ Veulennezañ : oh en em veuli anezañ.

Da Loeiz Kerzilin

Gwerziour awenet Breiz-Vihan !
Krouer uvel an “Erminig“ !
Te hag a ganas heb dihan

On Mamm-Vro war da zelennig !
Te, ar mestr fur hag en-deus greet
Kemend a ziskibien feal !
Te hag a zo bet ken skoet
Gand eun tonkadur displeal !

Ankouez hirie tristidigez
Ha poan ene hag enkreziou
‘Vid degemeroud gand dudi,

O ! Kerzilin ! anaoudegez
Karantez wir, trugareziou
Ha doujañs don ar Vreizidi.

Mathaliz (G. Le Rumeur)
(ag euz Gorsedd).

An dervenn goz

Gwechall, pa daole an dervenn
En-dro dezi, nerzuz he fenn,
A-dreuz hed he skourrou glaz,
Laboused Breiz a-strolladou
A blave war he divreh braz
'Vid sutal o c'hwitelladou.

Neuze avelig flour an hañv
O luske ; amzer rust ar goañv,
An erh, an arnev hag ar glao
War ar wezenn en he hozni
'Zo kouezet/ He halon atao
Avad, 'zo chomet beo enni.

Dioh an dervenn goz, dispennet ;
Al laboused ne dehent ket :
Evelkent e teuont a-bell
Da blava war he skourrou noaz.
Kan laouen ha trouz diou-askell
En eo hreiz a vez klevet c'hoaz.

Th. Pilven Ar Zeveller.

